

ACADÉMIE DE RENNES

SESSION 2005

**CONCOURS EXTERNE / SECOND CONCOURS INTERNE  
DE RECRUTEMENT DE PROFESSEURS DES ÉCOLES  
*SPÉCIAL LANGUES RÉGIONALES***

**BRETON**

**ÉPREUVE ÉCRITE D'ADMISSIBILITÉ**

L'usage de tout ouvrage de référence, de tout dictionnaire et de tout matériel électronique est rigoureusement interdit.

**Durée de l'épreuve : 3 heures**

**Coefficient : 3**

CONCOURS EXTERNE / SECOND CONCOURS INTERNE DE RECRUTEMENT  
DE PROFESSEURS DES ECOLES

BRETON

EPREUVE D'ADMISSIBILITE : Commentaire guidé

Session 2005

Kaout ur mab medisin !

«Sell 'ta ! Te eo a zo aze !»

Souezhet-bras e voe e vamm da Yannig o welout anezhañ o tifoupañ en e gambr. Edo-hi azezet war ar gwele e-kichen an daol vihan, ur c'haierig digor ganti etre he daouarn. Ul liv oa savet warni, gwenn-kann oa he dremm. Ne voe ket pell ar paotr yaouank o kompren ar pezh a oa bet o lenn. Hag hi dirollañ da ouelañ.

«Petra a zo o c'hoari ganez ?» emezañ.

Mil abadenn he devoe o tistagañ an disterañ ger. Lopañ goustad a reas war he divskoaz gant e zorn d'he habaskaat. Ne oa ket boas da boket, na da zispakañ ar pezh a veze en e galon. Ken nec'het all e oant o-daou.

«Gouzout a raen,» emezi a-benn un tachad. «Ni a zo re baour, re zister evit soñjal kaout ur mab medisin.»

O paouez lenn e gaier oa, el lec'h ma skrive-eñ bemdez e soñjoù ha darvoudoù e vuhez. Edo Yannig nevez-kuitaet gantañ Skol-ar-Vezegiezh evit mont war studi ar skiantoù. En em gavet er pempvet bloavezh e oa deut anat dezhañ ne c'hellfe ket kas e ziv garantez a-benn war un dro, e vicher vedisin hag ar sonerezh. Unan a zaou, ret-mat oa dezhañ ober e zibab. M'en doa dilezet e studioù-medisinerezh ha lakaet e anv e skol-veur ar skiantoù. Gant ar soñj da vont da gelenner. Troet-bras oa ivez gant skiantoù an natur. Kalz distropoc'h e vefe dezhañ ober skol : hiroc'h ha stankoc'h an ehanoù, berroc'h an dervezhioù-labour. Peadra a-walc'h da lodennañ gant ar sonerezh. Biniouer oa ha pennsoner ur bagad nevez-savet. C'hoant ha youl en doa ober eus ar bagad-se ur strollad sonerien ampart hag a gemerfe perzh en adsavidigezh e sevenadur hag ar brezhoneg. Mort en doa lakaet en e benn labourat a-zevri evit e vro.

«Abaoe ur miz bremañ !» eme e vamm mantret atav.

Ya, ur miz oa abaoe m'edo o studial er skol nevez. Meneg ebet kennebeut n'en doa graet d'e vreudeur ha c'hoarezed. E vignoned er bagad nemetken o doa klevet ar c'heloù. Aes a-walc'h oa bet dezhañ kas e vennad da benn, er penn kentañ da vihanañ. Meur a viz, meur a vloaz marteze, edo oc'h en em soñjal. Un derverzh a viz Here en doa graet e vennozh. Krak ha berr. Aet da gavout rener ar skol ha dispaket ar stal dezhañ. Klask e zistreiñ diwar e soñj en doa graet ar rener. En aner. O kaout ur c'huzulier war ar studioù oa bet war-lerc'h. «Kit betek ar penn, en doa lâret hemañ dezhañ. Da c'houde e c'helloc'h ober ho soñj.» Ne chome nemet daou vloavezh gantañ da ober. Pennek oa, ne cheñchfe ket ali na ne rafe. Bremañ avat oa nec'het. Un tamm bec'h oa savet er bagad, ne gave ket startijenn a-walc'h gant ar sonerien all. Hini ebet anezho ne vefe prest da zispenn e roudoù ha da zilezel e vicher hag e vuhez didrabas. Un tamm keuz oa savet ennañ hag a veze bremañ o tebrin e spered, noz ha deiz. Klask enebin a rae, hep dont a-benn. E kêr e veze o lojañ a-hed ar sizhun ; labour ha dudi en doa eno, ne soñje ket re. Da Sadorn e teue d'ar gêr, paotr yaouank oa c'hoazh. Gwelet e dud, e di bihan, ar gambr el lec'h m'oa bet savet a grigne e galon. Eno, en e gambr end-eeun, en doa skrivet bep sizhun e drubuilhoù en ur c'haier bihan a veze gantañ e tiretenn an daol. Kizidik-kenañ oa e vamm. Dedennet-meurbet oa bet a-hed ar wech gant studioù he bugale. Ha gouest e berr-amzer da kompren o c'hudennoù hag o zrivliadennoù. E-se n'he doa bet tamm dale o kavout ar c'haier.

«Giz a giri a ri,» emezi a-benn ar fin. «Ma n'out ket eürus el lec'h m'emaout. Nemet ni a gave deomp... Fouge a oa ennomp zokenoc'h...»

Kaout ur mab medisin ! Un enor bras evit un tad hag ur vamm. Dreist-holl en un tiegezh paour. En ur barrez vihan harp er mor e oant o chom. Micherour e Kêr-Vrest oa bet an tad goude bezañ bet martolod ha pesketaer. War e leve edo bremañ war-lerc'h ur c'hleñved hir. En atantoù diwar-dro e veze o tervezhiañ evit kas e amzer. Ar vamm a oa bet chomet er gêr da sevel ar vugale. Ar merc'hed ne vezent ket enoet d'ar mare-se.

Diwar E vrennigenn ziwezhañ gant Goulc'han Kervella; Al Liamm-An Here, 1999; (p. 117-120)

## **KAOUT UR MAB MEDISIN !**

### **DISPLEGADENN RENET**

1. Biniaouer ha pennsoner e oa Yannig en ur bagad. Displegit petra eo ur bagad. (2 boent)
2. Displegit an div lavarenn-mañ : «Giz a giri a ri» ha «Fouge a oa ennomp zokenoc'h». (2 boent)
3. «Hir ha stank an ehanoù, berr an dervezhioù-labour.» Setu aze sell an darn vrasañ eus an dud war ar vicher kelenner. Reizh eo an doare-se da welet an traoù, d'ho soñj? (3 foent)
4. Er pennad-mañ e weler ur paotr yaouank o tont eus un tiegezh (ur menaj / ur vereuri / ur feurm / un dachenn) paour aet war ar studi. D'ho soñj ez eo aesoc'h pe diaesoc'h mont war ar studi –ha betek penn- hiziv an deiz eget tregont vloaz 'zo, lakaomp? (3 foent)
5. E brezhoneg, n'eo ket kustum an dud «da zispakañ ar pezh a vez en o c'halon». Petra'soñjit-hu diwar-benn an dra-se? (3 foent)
6. Peseurt implij a c'hellfec'h ober eus ar pennrad-mañ gant ur c'hlasad divyezhek?
  - E peseurt klas(où)?
  - Gant peseurt pal(ioù)?
  - Daoust ha kempennet (krennet, eeunaet, ...) e vefe ganeoc'h en aviz e ginnig d'ar skolidi? (3 foent)

### **TROIDIGEZH**

Lakaat e galleg :

Adalek “O paouez lenn e gair oa ...” betek “... labourat a-zevri evit e vro.”

(4 foent)